

KANAOUEN NEVEZ

savet evit ar Soudardet yaouank o vont da Bartial

War eun ton gallek

1

Setu deut a mare
Ma renkomp partia
Paotret vad ar c'hanton
Allo prim hen hor zav
Ben eun neubeud amzer
Kanomp stard paotred ker.

Diskan :

Ar soudarded youank
Zo vont da gwiad o bro
Ebarz e berr termen
Evit au Drapo.

2

E n'em vodennomp oll
Paotret vad ha dispons
Bezomp yê a laouen
Deuz a greiz hor c'halon
Kanomp a boez hor penn
Ar gaera kanaouen.

3

Lod a ia da Bariz
Da gapital ar Franc
Lod all betek Tunis
Na pebeuz esperanc
Da welet pad hor bloa
Marvaillou ar c'haera.

4

Met araok mont en hent
Me ia dober eun dro
Betek ti va c'herent
Da laret kenavo
Ha d'am dous Janeton
Fleuren gêr va c'halon.

5

Kenavo va dous koant
O va muia karet
Vit ar vec'h diveza
E teuan do kwelet
Da c'hedal an dizro
A neve e hor bro.

6

Dalc'h dispons war da benn
Da gœf dantelezet
Da chal brodet ken kaer
Ken skeuduz da welet
Bruded gant an dud vad
Deuz ar mor dan Argoat.

7

Diouall an danjeriou
A zo stignet dre oll
Evit ar yaouankizou
Pere o c'hass da goll
Wellan dansou nevez
Vez great e peb parrez.

Diskan :

Ar soudarded yaouank
Zo vont da gwiad o bro
Ebarz e berr termen
Evit an Drapo.

8

Pa vint barz eur gaer vrao
Pell deuz bro Breiz-Izel
Te skribo aliez
O va mestrez fidel
Da lizer Janeton
Raio joa va c'halon.

9

Eur vechik an amzer
Zur houn te zigasso
Eun tam gwez a butun
Barz e da lizero
Hag eun tam pakaden
Kik sall pe andulien.

10

Neze e da yec'het
Gant va c'hamarado
En kaer pe eur c'hantin
Asemblez ni drinko
Rak neuz ket vell gwin
Vit tremen ar jagrin.

11

Hag a ben fin an anv
Pa deint e konje
Neuze me gonto d'id
Va stad a va doare
Ar pez a mo disket
Abaoe vint partiet.

12

Neze va douzik koant
A dostaio dar fin
Dar boan a dan tourmant
Koulz evel dar jagrin
Me zalc'ho star dar gont
Deuz an deiou da zont.

13

Da c'hortoz Janeton
Paz n'em fall galoni
Pa vint e faksion
Pe renkout biwaki
Pe siouaz aliez
Kouskad meur vech eur mez

14

Evel soudard vaillant
Me yelo pen-da ben
Dre ar pri pe ar fank
A meur vech er voulien
Evel pad ar brezel
Hon tud koz Breiz-Izel.

15

Dra zur ne garfen ket
Dispen roudou va zad
An Champagn nag ar Somm
N'em ganna barz eur c'hoat
Pehini vez anvet
En gallek Bois le Prêtre.

16

Goulomp ma reno stard
A peoc'h vad e peb bro
Ha frankiz da ben den
An emgleo etrezo
A dost koulz well a bell
Dreist oll e Breiz-Izel.

17

Neze war an douar
Vo fin dan tourmanchou
A digor frank an Hent
Dar gwir blujaduriou
Asemblez Janeton
Kanomp stard hor chanson.

Diskan diveza :

Ar zoudardet vaillant
Voa partiet warlene
Zo laouen o c'halon
O tizrei d'o c'hontre.



Emile GALLIC

kaner brezonek

PLOUGONVEN.

Gwerz savet en memor

d'an dud beuzet war al lestr SANT-PHILIBERT

d'ar 14^{ved} a viz Even 1931

Ton : KER-IS.

I

Kenvroiz eus a Vreiz-Izel,
Dont 'ran adarre d'ho kervel
Evit silaou eur ganaouen
'Meus rimet gant kals a anken.

II

Alies 'meus grêt tro ar vro,
Dreist-holl eun nebeut amzer 'zo,
A dost hag a bell diouz ar gêr
'Meus kanet dre bep sort amzer.

III

Goude distruj dour ar c'hreiste
Ilis Plougonven warlene,
Ha maleuriou bras Konkarno
E meus baleet meur a vro.

IV

Met breman gant kalz a c'hlaç'har,
Pa neus ken war hon taol douar,
E teuan da c'houlenn skoazel
Digant holl zent koz Breiz-Izel.

V

Da zont da harpa va fluen,
Ma kavin ar wir sklerijen,
Da ziskleriea d'ar Vretoned
Ar c'holl braz zo bet en Naoned.

VI

D'ar zul, parzeg a viz even
Aet d'ober eur bourmenaden
War lestr anvet Sant-Philiber,
A grenn-dost da gêr Sant-Nazer.

VII

War bemp-kant e oant partiet
Mintin mat a gêr an Naoned.
Vit tremenn ar bras eus an de
Barz en ezezen Noarmoutier.

VIII

Da vont, ar veach 'oa bet brao,
Met, siouaz ! ar mor en em zao,
Kement ne oa ken a voyen,
Kaer a oa esaat derc'hel penn.

IX

O tistrei, etal Sant-Gildas
Al lestr, barz e fons ar mor bras,
A zo bet aet en berr-amzer ;
Pebez glac'har d'o zud er gêr.

X

Pa glevchont ar c'helou spontus,
O oaint rentet ken malevus,
Chommet o zud e kreiz an dour
Heb n'helle den d'o zikour.

XI

Kriz a oa klevet o c'hlemmou,
Bugaligou, tadou, mammou,
Priejou nevez dimezet,
Holl nemet eiz int bet beuzet.

XII

Gwelit 'ta 'l lestr Sant-Philiber,
'Neus gret, siouaz, kalz a vizer,
'Lezel en fons ar mor distur
Tud en o brasa-plijadur.

XIII

Pevar-c'hant-hanter, pe war-dro,
'Lerer, deus kavet o maro
Hep konta ar vagaligou
'Oa c'hoaz war barlen o mammou.

XIV

D'ar re a zo bet saveteet,
Souetomp ar gwella yec'hed,
Mar teufont d'en em gonsoli
Demeus ar sort merzerenti.

XV

Ma teuy ar gonsolasion
Da ezetaat prout o c'halon
Ha da chom gren 'pad pell-amzer
Goude kement-all a vizer.

XVI

Hogen gwelit, va c'henvroiz,
'Zo kalz a dud en eur stad trist,
Kemeromp peurz en o foanion,
O sikouromp 'n o ezommou.

XVII

Rak ar blanedenn 'zo kalet,
Siouaz, en bro ar Vretoned,
Ar mor, gant e fallagriez
A ra maleuriou aliez.

XVIII

Nag a bet gwech 'leu ar sord fall
D'ober glac'har da gement all,
Rak 'nomp ket c'hoaz evit miret,
Deus dour, na kurun, na luc'hed.

XIX

Dreist-holl, Breiziz, tud an Arvor
Kouls er mene evel er mor,
Tud ar c'heriou ha war ar mêz,
Truez demeus an dudou kez,

XX

A zo hirio oc'h hirvoudi
Gant dienez braz en o zi,
Poaniet barz en pep sort feson
Gant trubuilhou ha ran-galon.

XXI

Silaouomp eta o c'hlemmou,
Greomp d'ezo aluzennou
Breudeur omp holl war an douar,
Kouls er joa evel er glac'har.

XXII

Hervez hon galloud hag hon stad,
Mez, deuomp holl a galon vad,
Karomp, greomp vad d'hon nesa
Tre ma vefomp war ar bed-man.

XXIII

Rak hini 'hanomp ne oar lenn,
'Pez a verk deomp ar blanedenn,
Met dre ma tremenn an deyou,
Ar miziu hag ar blaveziou.

XXIV

A pa deuf er toull ho tor
Deuit gant eur galon digor
Da zigemer gant karante,
Sikouromp an eil egile.

XXV

Ha neuze, holl e vemp laouen,
Hag ar vuez, berr da dremenn,
Rak hon poanion a zo dister
Kichen tud kez Sant-Philiber.

XXVI

Diskitar werz man, penn-da-benn
Sentit demeus skrid va fluen,
Ha sur 'oun, ar wir Vretoned
Deui muioc'h d'en em garet.

XXVII

En hon pedennou, barz er gêr
Pedomp Aotrou Sant-Philiber
Ma vezo ar gwir avokad
Vit an dud beuzet en e vag.

XXVIII

Goulomp, en amzer da zoned
Ar peoc'h etre ar Vretoned,
War vor, kouls vel war an douar,
Demeus hon traonien a c'hlaç'har.

XXIX

Rak ar vuhez, meurbet 'zo berr,
Buan e tremenn an amzer,
A greiz-holla 'vez diskaret
Ar c'hrenva a zo war ar bed.

XXX

Goulennomp en eur finissa,
Ar Baradoz 'vit an dud-man ;
D'an eiz 'zo chommet en buhe :
Ar yec'hed ha prosperite.

Emil GALLIC, kaner brezonek, PLOUGONVEN.